

Kanaouenn

diwar-benn ar werenn vraz benniget
en iliz Logivi-Plougraz,
ha roet dezi gand eun den mad d'ar barrouz.

War don : An diou Vreiz.

1

Aotrou Sant Emilion, Patron braz Logivi,
Gret ma vezo bepred beo ar Feiz en pep ti !
Na kaer ez eo pedi war douar Breiz-Izel !
Neb leh na vez gwelet kristenien mui fidel.

2

Paour a zanvez ez oh bet ganet
'Vel Mab Doue en-deus on prenet.
N'eus forz ! Eur Zant 'n-eus ket e bar,
Ha gand Doue 'ra 'vel ma kar.

3

Neb a gar Doue, a wir galon,
Dre oll d'an nesañ a vez mignon ;
Penaoz avad sikour ar paour
Pa na vez nag arhant nag aour ?

4

Aour nag arhant
N'eus ket ar Zant
N'en-deus nemed nemed nerz e bedenn...
Koad eun tammig
En e zornig
A zeu Bara souden.

5

Teod fall a vale e peb bro,
Ha gand gevier 'ra meur a dro ;
E Vestr a gred eo dispigner
Laer e varlenn, laer e vaner.

6

Me 'houvezo,
'Lar an Aotro'
Petra 'zo gantañ 'n e varlenn ;
Setu rimad
Bara deut Koad
Evid kas d'ar beorien.

7

Evid rei ar gweled d'eun den dall a-viskoaz
Warnañ Sant Milion 'ra hepken sin ar groaz.

Bugel maro da veo a zeu, pa bed Doue
Ouz daerou eur vamm baour da zelled gand true'.

8

Mil bennoz deoh, Aotrou ! c'hwi 'gar Sant Milion,
Ha d'an oll dud er vro ni 'oar ez oh mignon ;
yaouank eh eus desket penaoz ar hat hag aour
'Zo prestet da Doue pa vezent roet d'ar paour.

9

Aotrou Sant Emilion, Patron braz Logivi,
Gret ma vezo bepred beo ar Feiz en pep ti !
Na kaer ez eo pedi war douar Breiz-Izel !
Neb leh na vez gwelet kristenien mui fidel.

10

'Uz d'an aoter vraz, ar werenn,
Na seder eo ha lirzin !
Na dreizti dousañ sklêrijenn
Pa deuy 'n heol da hoarzin !
An Aotrou Kont hag e bried¹
Mignoned Zant Milion,
Didamant o-deus i roet ;
Warne bennoz on Patron !

11

Heb mar liez den a Wened
Skoazell amañ 'n-eus kavet,
Hag o pedi Sant Milion
Peuh 'zo deuet en e galon.
Evelkent, me 'oar, on merhed
E vo fae gante kenañ
'Vez Sant Milion mui karet
E Gwened evid amañ.

12

Pe wir pe gaou ! Gwened ha Sant-Brieg
'Vo mad atao 'vel an dud ezommeg.
Mirom kevred, mirom yez on zad-koz,
Ar brezoneg 'vo yez ar Baradoz.

13

Ha pa halvo Doue on ene d'an Neñvo'
On Zalver d'e Êlez 'laro :
Ar re-mañ oll a zo breudeur
Da Zant Erwan pe da Zant Milion e vreur.

14

¹ An Aotrou Kont hag e bried : An Aotrou Kont, hag an Itron Kontez Troguindy.

Touom da zond da vla²
Amañ da bardona !
Bremañ ar chapel 'zo iliz,
Kaerroh evidti ne weliz ;
Touom da zond bep pla
Amañ da bardona !

² vla : vloaz.